



(87)

# KIMIAD

EUR

# SOUDARD YAOUANK.



Var tòn : *Al Labourer....*

Va c'halon a zo frailhet dre nerz ma enkrezoù ,  
Va daoulagad entanet n'ho deuz mui a zaelou ,  
Deud eo siouaz ann devez ma renkân dilezel  
Lec'h kaer , ma bugaleac'h , ma bro douç Breiz-Izel.

Kenô ! did ma zi balân , kuzet bars ann draonien ,  
Tachenn glaz var be-hini , bugel , e c'hoarienn ;  
Gwez ivin ker bodennek , en disheol d'euz pe-re  
E pad tomder ann anvou e kousken da greis-de.

Kenô ! kenô ! mamm à tad , brema n'esperit mui  
E chomfe ho mab karet vit harpân ho kozni ,  
Evit gounid d'ec'h bara , `vel m'ho peuz gret dezhan ,  
All lezenn zo didruez ho kuitaat a renkân.

— 2 —

N'ag a vech , ô mamm dener , a renkfet-hu lenva ,  
Pa zeui ma c'hi ankenet en dro-dec'h da ruza ,  
Pa welfet , bars ann oaled , va skabellik goullo  
Ag ar c'hiffind o steüi deuz ma fenn-baz dero.

Kenô bered ar Barros , douarou konsakret ,  
Pe-re a guz va c'herent gant ar zalver galvet ;  
Da wël ann anaon klemmus 'nin mui war ho peziou  
Da skuilla dour biniguet mesket gant va daelou.

Kenô va muia karet , ma dousik koant Mari ,  
Eur blanedenn diegar a deu d'omm glac'hari ,  
Evruded a levez skeuduz zo tremenet  
'Vel en oabr , ar gougoulen gant ann avel kasset.

'Na welin mui da lagad ker lemm a ker laouen  
Ho wirvi gant plijadur , enn ti pa erruenn ,  
Da zornik wenn ker mibin o trei ar c'har en dro ,  
Da wouez flour mui n'a glevin o kana va gwerzo.

Pa oamp er c'hatekismou , onn daou c'hoaz bugale ,  
Or c'halonou diskiant , en kuz ha n'em gleve ,  
Dirag Gwerc'hes ar c'hroaz-hend , nag a vech e touejomp  
N'a erru-je birviken , disparti entre-z'omp.

Yaouank a dibreder , siouas n'e wiemp-ket  
Nag a bed c'hwerventez er vuez zo mesket ;  
Evid-omm n'e oa , neuze , Lezennou n'a Roue  
N'anveemp mert eul Lezenn , hini ar garante.

Kenô va nez-amezek , Yannik va gwir mignon ,  
Kamarad va c'hoariou , va breur dre ar galon ,  
Piou a gemero bremâ , eul lod euz ma foaniô ?  
Piou a gomzo ganneme deuz ar ger hag ar vrô ?

— 3

Ep-hon te ielo bremân , er parojou tosta ,  
 Da bigosat all leuriou bars el lasou-dorna ,  
 Ep-hon te iel da c'hounid maout ar c'hourennadek ,  
 Da jaicha var rubanou ebars ar varadek .

Kenô va c'hazek melen , skanv evel eunn eïès ,  
 Mistr evel eul logoden , gentil vel eunn oanès ,  
 N'ed 'sentin, ken indann-hòn, gant ann hast, o trippâl,  
 Ma daouarn mui n'e stagfont ar zeïen war da dâl.

Kenô , ma c'hi kès Mindu , ma leal kamarad ,  
 N'effomp ken , dre ar glizen , da glak roudou ar c'had ;  
 N'e glevin ken , er mene , da chilpaden skiltrus ,  
 War ma dorn mui n'e zentin da deod garantezus .

A benn eunn nebeut amzer , kalz a vignonet ién  
 Bars er zoudard divroët , ep mar , n'e sonjfont kén ,  
 Mès da galon te , Mindu , n'eo ket ken ankoezus  
 Pell he ri c'hoas va c'hanvou , dre da iezou klemmus .

Kenô ta plijaduriou , leuriou-nevez , festou ,  
 Rentadeg-neud , noz-vezou , foariou ha pardonniou ,  
 Ebattou ker birvidik , biniou sard a sklentin  
 N'a drido mui va c'halon gant da zoniou lirzin .

Kenô kement a gâran , keno da virviken !  
 Pell deus a Vreïis me varvo , mantret gant ann ankenn ,  
 'Vel eur blantenn kizidik , evit ar vrô krouët ,  
 A renk gwenvi a mervel , kerkent m'he divroët .

FIN.

*Propriété de l'Éditeur :*

J. Haslé

P. Troux